



Douarnenez, d'an 13 a viz Gwengolo 2008

Keneiled ker,

Setu sklaeraet ar jeu gant an distro-skol-mañ pa weler :

- al live brezhoneg dister goulennet e fin ar c'hentañ derez gant ar programmoù ispisial evit ar yezhoù "rannvro" ;
- n'eus plas ebet evit ar brezhoneg a-fet danvez er programmoù nevez,
- diaesterioù an eil derez divyezhek abalamour d'ur gartenn polioù na glot ket atav gant ar pezh a zo gwir war an dachenn, pe ne vez ket lakaet da vont war-raok gant an deskadurezh stad ;
- ar pezh eo deuet da vezañ an dibab brezhoneg er skolajoù hag el liseoù ;
- n'a ket war-raok kartenn-skol ar skolioù divyezhek meret gant ar rektorelezh ;
- ar fed n'emañ ket pell ar re 2 vloaz da vezañ skarzhet deus ar skolioù ;
- n'ouzer ket petra a deuo da vezañ rakstummadur ar gelennerien pa ne vo ket mui deus an ESSM¹ ;
- n'eo Kuzul Akademek ar Yezhoù Rannvro nemet ur vodadenn e-lec'h ma vez graet van da selaou ac'hanomp ;
- abaoe m'eo achu ar gevrat-steuñv Stad-Rannvro e miz Genver 2007 eo stanket an hent gant ar Stad. Ne fell ket dezhi sinañ ur gevrat nevez a glotfe penn-da-benn gant ezhommoù ha palioù ar c'helenn brezhonek.

¹ ESSM (Ensavadur Skol-veur Stummañ Mistri) : IUFM

Dont a ra da vezañ anatoc'h ar pezh a oa anat dija : ur riskl bras a zo e tistrofemp d'ar stad ma oa an traoù er bloavezhioù '80.

Ne vo nemet un diskoulm padus : treuzkas ar galloudoù hag an arc'hant deus ar Stad d'ar Rannvro evit merañ ar c'helenn brezhonek. Aze e ranker labourat gant dilennidi Breizh neuze.

Goulennet hon doa gant J.Y. An Drian (prezidant ar C'huzul Rannvro) ma vije goulennet gantañ an treuzkas galloudoù digant ar gouarnamant, ar pezh en doa graet e miz Mae. Dibaoe, **respont ebet** a-berzh ar Stad... Bet omp o kejañ gant J.Y. Le Drian dibaoe ha lâret en deus deomp e vefe prest neuze da vont asambles gant dilennidi deus Euskadi hag Elzas da Bariz evit goulenn an treuzkas galloudoù pa vo kaoz e 2009 deus al lezenn war ar yezhoù "rannvro" (bet prometet gant C. Albanel da vare an tabut war ar yezhoù "rannvro" er Vonreizh).

Kement-se a chom komzoù ur politikour evel-just.

D'ar Vretoned da ziskouez dezhañ bremañ ne c'hell ket chom hep ober ar pezh en deus prometet ha deomp-ni ivez da reiñ pouez dezhañ pa'z aio da varc'hata gant ar gouarnamant !

Emzalc'h ar gelennerien a zo a-bouez spontus er jeu-mañ. Bez' emaoomp-ni war ar pemdez er c'hlasoù, bez' e vevomp-ni ar brezhoneg en hol labour hag en hor familhoù !

Bremañ n'hon eus ket a choaz :

**Ret eo deomp diskouez youl ar gelennerien
d'an 20 a viz Gwengolo er vanifestadeg² e Naoned !
Strollet 'vo ar gelennerien en-dro da c'hiton UGB,
deomp-ni da vezañ klevet ha gwelet !**

² Kavout a reot titouroù poellek war ar vanifestadeg war : <http://www.bzhplus.com>